

kazetenn ar stourmoù e breizh

10 Lur

# breizh-mañ

VIZ EBREL 1983 N<sup>o</sup> 19 10 Lur



**GWASHOC'H GWASHAN AN DILABOUR ER VRO**

**G.A.B. PONDI 16 - 22 A VIZ MAE**

Salut deoc'h

Kavet en eus brezhoneg er vanderd dreset "Boule ha Bill Globe Trotters" gant Roba, Ti Moulerezh Dupuis 1982.

Ar vanderd a zo skrivet e galleg, nemet war div bajenn e vez kavet un tamm brezhoneg. Ha piv a gomz hor

yezh ? Indianed eveljust, tud gouez ha droch (ma vefe net kredit ar skrivagner) evel ar Vretoned. N'eo ket marv Behasin c'hoazh !

Gant va gwellañ soñjoù breizhek.

Jean-Do Robin Loudieg

RADIO - BREIZH - IZEL

Souezhus eo nag e vez skrivet ha komzet diwar-benn RBT-RBO, ha peurlivriañ hep tamm anaoudegezh eus ar doare ma tremen ar traoù eno. Souezhusoc'h c'hoazh ar pennad bet skrivet gant Mahoto Nogushi e -barzh "bremañ" n'eus ket pell 'zo.

Gwelloc'h e vije bet dezhañ dont d'ober un droiad betek Kemper da welet penaos e tro e gwirionez, araosk skrivañ kement a draoù sot.

Tamall a ra deomp darvez ar abadennoù e brezhoneg. An dra-se c'hoazh a c'hellomp digemeret. Ha c'hoazh !! Ret e vije da M.N. gwelet penaos e kustumomp labourat abaoe 9 miz : labourat 10 pe 15 eur-vezh bemez, na sadorn, na sul peurliesañ, ablamour d'an diouer a dud hag a arc'hant, rankout stourm hep ehanañ ouzh renerien Radio-France e Paris, pa ne vez ket ouzh lod eus ar re a zo e Kemper. Fiziatañ am eus e c'hell'o Mahoto hag ar dud all ivez, kompren ne vez ket aes labourat en ur seurt endro, pa vez graet kement a c'hoap hag a fae warnomp. Evel-just e c'hell'o ar abadennoù bezañ gwelloc'h eget n'emaint, met dija, e-keñver ar pezh a vez roet deomp evit sevel anezho, ne gav ket

din e vijent ne fall, ha n'eus nemet poumer war ar maez un tammig evit kompren o deus abadennoù brezhoneg RBT graet vad evit hon yezh. Kalz am-ije da skrivañ evit prouñ ar pezh a lavaran amañ, met ma'z eus unan bennak a vije troet da ziskiziout e c'hell'o ar- tañ diskouez dezhañ al lizhiri hon-eus bet resevet gant ar dud, tud ar bobl, abaoe ma 'mañ krog RBT da skignañ.

Ar pezh n'on ket evit digemer, avat, e-barzh lizher M.Nogushi, eo e tamalle deomp onestiz : lavaret omp anavezet evit bezañ kilstoumerien ! Ha petra c'hoazh !! Ret eo din lavaret on bet feuket bras gant ar dra-se, ha digalonekaet un tamm mat ! Ma vijemp kilstourmerien, a-enep d'ar brezhoneg, kement-se, ne vijemp ket o labourat noz-deiz e Kemper, a-enep d'an hall, pe dost, o koll om yec'hed, hag om buhez-familh. Ha ne welan ket e vije kement-se a dud e Breizh a vije prest d'en em lazhañ e-giz m'hon eus graet evit haout nebechoù goude-se, ouzhpenn.

Un dra all a zo ivez, e-barzh lizher M.Nogushi, hag a zo souezhus : n'eus ger ebet diwar-benn ar abadennoù e galleg. Met non de d... !, a-

enep da biv emañ lod o stourm eta ? A-enep d'ar vretoned o-unan ?? Hag ez eus tro d'en em c'houlenn piv eo ar gil-stoumerien er afer-mañ. Pe-bezh spered a zo gant ar vrezhonegerien memestra ! Ur wech ouzhpenn : daou vreton : daou enebour. Pase poent eo d'ar vrezhonegerien kompren n'eo ket er ur en em zic'hastañ an eil egile e vo kaset an traoù war-raok, met en ur vezañ unvan. Ha gant haazhoù pe lizhiri evel hini Nogushi, ne vo graet nemet digalonekaet ar dud hag a glash ober un dra bennak. Peadra a zo da goll pasianted, a-wechoù, rak ma kendalc'h lod gant o spered fall da dabulal tud a youl vat, ne vimp ket pell o vezañ trec'hed da vat. Poent eo gouzout piv eo om enebourien !

Ha ma kav da V.Nogushi ez eo barrekoc'h ha speredekoc'h eget ar re all, pe gouest da "saveteñ Breizh e-unan penn", n'eus ken nemet dont da labourat en RBT-RBO en om plas, hag e welo. Evidon-me am eus nevez-roet va dilez, setu ma faot dezhañ komezet va flas er radio, e-mañ tamm evitañ !

Rozenn Milin.



Kelenn brezhoneg e Kembre

Souezhus deskiñ brezhoneg amañ ? N'eo ket, pa weler kement a dud a zeu d'an c'hentelioù. Perak e teuont ? Ha perak e kelennan ?

An dud a zo gwall ziden- net gant ar pezh emaint o klask deskiñ. An dud-se a zo kontant da zeskñ hon yezh evit mont da welet komaraded o deus e Breizh hag a breg brezhoneg, peotramant evit mont da chom e-barzh hon bro. E Skol-Veur Kendiz e vez kentelioù krenn-brezhoneg, met n'eus ket kentelioù evit ar re a glask tennañ implij eus hon yezh bemez. Setu dre voneur o deus ar dud an digarez da gavout kentelioù en ur greizenn kentelioù-noz.

Pell 'zo eo bet kroget gant ar c'hentelioù-noz e-barzh ar greizenn-mañ. Bep bloaz e vez kelennerien nevez o kelenn, setu ez eus skolidi zo bet deshet ar memes traoù div pe deir gwech ganto. Met an dra-se a ziskouez amañ ar

brezhoneg ur yezh e c'heller deskiñ amañ evel fonzh pe-seurt yezh all. Lavaret en deus an der a ra war-dro ar greizenn, eo ar brezhoneg un dra emañ o klask mirout e-giz un dra a dalvoudegezh e-touez e gentelioù. Sur a-walc'h en deus bet plijadur o welet e teu muioc'h-muioc'h a dud da heuliañ ar c'hentelioù brezhoneg.

Setu, perak deskiñ hon yezh da Gembreiz ? D'am soñj eo pouezus evito kavout kentelioù e Bro-Gembre, peogwir pa teuont da Vreizh int gouest da sikour ac'hanomp. N'int ket deus ar vro, n'int ket bet gwasket gant ar memes sevenadur, neuze ez int gouest da laret eo bet aesoc'h dezho deskiñ brezhoneg peogwir e pregont ur yezh heñvel. Peogwir eo ken diaes lakaat ar brezhoneg da vont war-raok e Breizh, n'eo ket ne fall kavout tud da skoazellañ ar Vretoned en tu-mañ da Vro Breizh...

Andrev Daniel Kendiz

Ur skodenn 300 lur a gasan deoc'h a-gevret gant al lizher-mañ evit stankañ un tammig an toull e-barzh kef Skol An Emsav. Spi am eus e vo diskoulet hepdale kudennoù arc'hant SAE rak pouezus-kenañ eo he flas war dachenn ar stourm evit ar brezhoneg e Breizh.

A wir galon ganeoc'h, B. An Nail. An Oriant. Setu emañ ur skodenn evit sikour Skol An Emsav.

Mark Ar Briz 61100 Flers. J.C. Boudet Roazhon.



AR MEROUR.

B. An Nail... 300 lur  
J.C. Boudet... 50 lur  
Mark Ar Briz... 300 lur  
L. Bihannic... 500 lur

MIZ EBREL ...

UN HENT NEVEZ ...

**E**penn kentañ miz Ebrel ez eus bet dalc'h et un emvod vras e Roazon.

Gant Rector an Akademi e oa bet galvet an holl gevredigezhioù sevenadurel dezho da gavout un diskoulm da unan eus ar c'hudennoù pouezusañ a sav e kelenn ar brezhoneg. An diviz-mañ en deus bet tro da glevet kannad hor c'hazetenn :

**Per Bernig** : "Ne c'heller ket kenderc'hel da gellenn ur yezh en ur ober gant un doare-skrivañ en ur c'hlas ha cheñch doare er c'hlas war-lerc'h. Ne c'heller nemet koll ar skolidi gant doareoù e-giz-se. Evit klask un diskoulm d'ar gudenn-mañ eo bet goulet ganin bodañ ac'hanoc'h".

**Alfoñs Kergorventenn** : "Kompren a reom abeoù Aq Ao. Rector, ne heller nemet beza laouen o wled eh om bet klevet da larom abaoe ar bloavezh 1951 eo poent unvani an doareou-skriva. Un dra avad, eo gompren ket avad, eo perag ober seurt reunionou pa z euz ur skritur a zo bet anavezad gant an deskadurez stad abaoe keid-all a-amzer dija."

**Perine Kervlevek** : "Ar brezhoneg a rank bezañ ur yezh dec'haviantel. Diempradur ar reizhskrivadurioù a zo dazgweredet gant diempradur ar gevredigezh henvoazel. Seurt stuzegezhioù ne c'hellont dizeñañ nemet gant emskiantekadur ar bloc'h araokour."

**Per Dezire** : "Kamaraded, ni zo progressisted ha n'hellomp ket meskañ gand komzoù a ra fae war langach ar broleterien a vez koulskoude disegnañ sed gand ur gouarnamant ez omp a-du gantañ, daoust ma ne gomprenomp ket c'hoazh penaos e e chom diseblant e-keñver kultur pobleg ar vretoned en desped d'ar promesaoù graed gantañ. Nemed ur skritur etrerannyezhezh ha laik a roio tu da doud ar broleterien a zo e Breizh d'en em intent etreze."

**Job Sioulik** : "Ur vroad a empleg ur skritur. N'hon eus ket da dabulal gant rannvroelourien o deus diskouezet ne oant ket gouest da sellet ouzh ar vretoned evel ur bobl o stourm evit he frankiz politikel hag a vo skarzhet gant lanv an istor."

**Lutig Kerbrad** : "N'omp ket gwall chalet gant

kudenn ar skritur. Unan hon eus dibabet, an hini implijetañ evit roñ muioc'h a bouez dezhi c'hoazh. Lod ac'hanomp a zo e "majorite" ar gouarnamant, lod n'int ket, met n'eus tamm dizemglev ebet war dachenn an daore-skrivañ. Broadelourien hag anarkourien a gav an tu d'en em glevet pa skrivont gant ar memes doare-skrivañ."

**Per Bernig** : "Gwelet a ran e klaskomp holl tizhout ar memes pal. Me soñj din e vo moaien deomp en em glevet e-kerz an emvoudoù da zont. Kinig a ran deoc'h en em gavet en-dro pa vin distro eus ar veaj studi a rankan ober er Portugal ar miz a zeu. Da c'hortoz, e larin d'an Ao. Rector emaoamp war an hent mat. N'on ket sur ho peus amzer da dapet ur benne asambles met kinig a ran deoc'h memestra. Itron, amzer ho peus..."

"Bremañ" a roio deoc'h da c'houzout kement nevezenti a c'hell'o degouezhout diwar disoc'hou an emvod frouezhus -se ha re ar ve a vo war-lerc'h. Chafis vat a ran-komp hetif d'an dileuridi kalonek-se.

Mikael Tanguy.

# gouel ar brezhoneg

**SOLDAT  
FRANSEZ**



## e POND1

**16- 22 A VIZ MAE**

**LID 60vet DEIZ-HA-BLOAZ  
MARV EMILE MASSON**

**E-PAD AR SIZHUN :**

diskouezadeg hag  
abadennoù a bep seurt  
tro-dro Pondi

**D'AN 20-21-22 :**

**Gouel bras e Ker-PONDI**


Kanerien

(Breizh, Kembre, Iwerzhon)

Fest noz,

C'hoariou,

Standou



"Lazhet gant ar Frañs-  
zieren".

**L**azhet gant ar Frañ-  
sieren, setu ar pezh  
a lennomp e fin  
film Philippe Durand.  
N'on ket evit displegan  
istor Frañsez Laorañs ;  
lennerien Bremañ o deus  
klevet komz moarvat eus  
den-se fuzuilhet gant  
arme Bro-C'hall e-pad ar  
Brezel 14, peogwir ne  
gaoze nemet brezhoneg. Ar  
film, e gwirionez, n'eo  
ket kement-se istor F.  
Laorañs, istor tud Vreizh  
Izel na ouient ket gal-  
leg eo kentoc'h.

Teir lodenn a zo.  
En amzer dremenet, buhez  
Frañsez displeget gant  
kanaouenn Gweltaz ar Fur  
(istitlet e galleg). En  
amzer vremañ, barnidi-  
gezh ur paotr heñvel  
ouzh Frañsez na gomz ket  
galleg hag ar gastiz di-  
druez evitañ.

Al lodenn faltazi  
en amzer-vremañ, buhez  
familh Frañsez. C'hoar  
Frañsez, he deus koshaet  
evel-just, hag he merc'h  
vihan a vev gant Frañsez  
bev ha yaouank c'hoazh.  
Ur seurt tasmant m'ho  
peus c'hoant.

Al liamm etre an  
taolennoù a vez graet  
gant ur c'hazetenner eus  
Pariz (a orin breizhat).  
Gwelout a ra barnidigezh  
Le Gall hag e soñj dez-  
hañ eo ur vezh barn ur  
paotr e-giz-se peogwir  
n'eo ket gouest d'en em  
zifenn e galleg evel-  
just.

Gant ur mignon e  
vez roet dezhañ da c'hou  
zout istor ar "Soudard  
Frañsez". Mont a ra da  
welout ar familh. Ne la-  
ran ket muioc'h. Ar film-  
se a lak ac'hanomp da  
gompren pegen disprizet  
e oa hor yezh, pegen dis-  
prizet e oa ar vrezhone-  
gerien gant ar Stad  
C'hall hag al lezennoù.

Met un dra 'zo blij  
ket din e-barzh. Darn  
vrasañ eus an dud a oar  
galleg bremañ e Breizh.  
Taolenn barnidigezh ar  
paour kaezh Le Gall na  
oar ket ar yezh-se a zo  
trist a-walc'h evel-  
just. Met pa weler an  
istor-se ez eus tu da  
soñjal goude, e oa ur  
vezh met ne vo ket gwe-  
let ken traoù ar-seurt-  
se a-barzh pell ha mat  
pell 'zo.

Setu perak n'eo ket  
troet an istor war an  
amzer da zont d'am soñj,  
na war amzer da zont ar  
vrezhonegerien a-vremañ  
a zo divyezheg mui pe  
vui, na war hini hon  
yezh.

Difennet eo c'hoazh  
en em zifenn e brezhoneg  
el lez-varn koulskoude.

Grall, Garabello,  
Kerrain, Korbel..an holl  
anezho a c'helle komz  
divyezheg !

Gwechall e oa ret  
komz galleg, pa ne oa  
ket posubl ne oa nemet  
chom dilavar.

Bremañ eo ret komz  
galleg atav. Met tu a zo  
da zibab : komz ar yezh-  
se pe chom dilavar. Pe-  
seurt kemm a zo evit ar  
brezhoneg ?

An holl dud-se a zo  
bet kondaonet krisoc'h  
peogwir ez eo bet diba-  
bet ganto komz brezhoneg  
el lez-varn.

An dra-se n'eo ket  
bet lakaet er film. Ret  
eo stourm evit kavout an  
tu da gomz hor yezh, el  
lez-varn, er vuhez fon-  
ran... Rak d'am soñj, hon  
eus ar gwir d'ober gan-  
ti.

Er film-se ne ra  
netra evit lakaat an dud  
da gompren-se.

Marteze n'eo ket  
bet soñjet gant P. Durand  
ha n'eo ket ar pal? Mar-  
teze ne oa ket tu d'ober  
-se gant FRJ ?

Forzh penaos aze e-  
mañ dazont ar brezhoneg:  
AR GWIR da zibab da gomz  
hor yezh e pep lec'h.

Sellit ouzh ar film  
memestra evit ur wech  
n'eo ket ur "bekasinaj"  
bennak, met un istor a-  
feson. Dalc'homp soñj  
memestra rak ma oa ur  
vezh Istor Frañsez, ma oa  
oa ur vezh Istor Le Gall  
, Istor Grall, Garabello,  
Menard, Kerrain, Korbel a  
zo ur vezh ivez.

Amañ ha bremañ eo  
ret labourat rak ma ne  
cheñch ket stad hor yezh  
er vuhez foran ez eus tu  
da skrivañ diouztu :  
"Istor an Hini-mañ-Hini  
a vo ur vezh !".

Ha pa welan e fin  
ar film Frañsez lakaet  
en toull gant Paotred  
Mari-Robin e welan ar  
brezhoneg lakaet en  
toull.

Erwan Ar C'hoadig.

# DU, DU, STAD AL LABOUR E BREIZH

O lenn o c'hazetennoù d'ar sador n'vintin 9 a viz Ebrel ez eus bet dihunet kalz Bretoned eus un hufvire marteze : "labour" : ur gwener du e Kerne" a embann Ouest-France a-hed ur bajenn a-bezh. Ya, pell 'zo ne oa ket bet kaoz da serrif, a-greiz-holl kemend-all a stalioù hag a labouradegoù, pe da vihanaf da lakaat implijidi ha micherourien er-maez. Pe marteze ne oa ket bet taolet kement a bled abalamour d'ar spi a oa deut gant ar cheñchamant politikel e Frañs. Da gentañ, unan eus labouradegoù koshañ Breizh, savet e 1420, stal priajou HENRIOT a laka mererezh an ti etre daouarn ar Sindik. Memes devezh : GALVA-RAPIDEX, e Kemper, labouradeg fardañ binvioù evit an tiez-sevel-yez, a ziviz skarzhañ 64 micherour, goude ma voe fiziet ivez er sindik. Kalz e labour ar sindik e Kemper. Ha war ar marc'had e tiviz ar stal BOLLORE, unan all eus reoù koshañ Breizh, serrif uzin ODED (savet e 1822), en Erge Vras, e kichen Kemper.

Ar wech-mañ avat ne



vo ket lakaet ar vicherourien er-maez, 80 anezho, peogwir e vint kaset da labourat e-barzh uzin KASKADEG, e-kichen SKAER. N'eo ket hep koll ebet koulskoude, peogwir o tremen eus 38 eurvezh ar sizhun da 35 eurvezh emañ ar vicherourien o vont da goll 15 % eus o barregezh-prenañ evit 1983. Eus un tu all da Vreizh ne ouezer ket kennebeut peseurt amzer da zont a vo gant 200 micherour COVELIOU BZH e Sant Brieg (Forges et Laminaires de Bretagne) fiziet er sindik (ur wech c'hoazh) abaoe ouzhpenn tri miz. Lavaromp c'hoazh ez eus kudennoù e TI OBERTHUR, moulevezh bras-sañ Breizh e Roazon, ez eo gwall defval an oabl a-us d'an holl stalioù-yez (Tilly, Doux, UNACO) a zo aet war gresk buan tre hag en em gav bremañ en ur stad diaes pa'z eo enket marc'hadou ar Reter-Etre gant kevezerezh Bro Brazil dreist-holl. Prederiet tud 'zo gant da-zont an uzin amerikan "FLEETGUARD", staliet en Kemper daou vloaz 'zo gant harp an ti-kêr hag arc'hant ar vro. Gant ar raparifiñ bagoù e Brest

n'eus koulz lavaret tamm labour ebet abaoe penn-kentañ ar bloaz hag en em gav an A.F.O. (Ateliers Français de l'Ouest) en ur stad diaes-tre : labour ebet war wel. War dro 30 000 eurvezh dilabour e miz Genver, 12 000 e miz C'hwevrer, ha 31 000 e miz Meurzh zo bet paeet evit al lodenn vrasañ gant ar Stad.

## DILABOUR chifrou ankenius diya e breizh

Koulskoude n'eus ket ezhomm da washaat stad an dilabour e Breizh. Fall a-walc'h eo dija. An taolioù skoet ouzh labouradegoù ar vro a-greiz-holl a zigoro mor-arvat daoulagad an dud : keñverioimp da skouer feur an dilabour e Rannvro Paris (7,7 %) gant hini Breizh ar pemp departamant (11,66 %) d'an 31 a viz Here 1982. Da lavarout eo 11,2 % en Aodoù an Hanternoz, 10,6 % e Penn-ar-Bed, 10,5 % en Il-Ha-Gwilun, 13,6 % el Liger Atlantel hag 11,9 % er Morbihan.

En holl e oa e Breizh 162 078 o klask labour. Hag aet eo an niver war gresk abaoe. E dibenn miz C'hwevrer 83 e save feur an dilabour da 9,55 % eus ar boblañs o labourat e Frañs ha 10,46 % evit pevar departamant ar Rannvro ofisiel. Dindan daouzek miz eo ur c'hresk a 3,81 % a zo bet evit Bro-C'hall ha 7,94 % evit Rannvro Vreizh. Gwashoc'h eo an dilabour amañ eget e Bro Loren (9,9 %).

Petra 'vo neuze ma vo serret stalioù all pe lakaet implijidi er-maez? Abalamour da-se eo krog ar sindikajoù da fifval. Daoust ha gouest e vint da hejañ an dud war-lerc'h bloavezhioù a stouder e-keñver ar gudenn-se ?

Tangi Louarn.



## UR C'HUZAL

## EKONOMIKEL EVIT KERNE ?

Dre ur vodadeg kelaouiñ, d'ar gwener 8 a viz Ebrel 1983, he deus kinniget Unvaniezh CFDT Bro Gerne e vefe savet ur "C'HUZAL EKONOMIKEL HA SOSIAL BRO GERNE". "N'eo ket posubl ken", eme ar CFDT, "kemmer ar gomun da ziazev evit an implijou". Kalz reishoc'h e seblant, er c'hontrol, prederiañ adalek an "dachennad labour", da lavarout eo al lec'h m'en em gav tolpet an dud en-dro d'o labour ha d'o zi, pe adalek meur a "dachennad-labour" liammet kenetrezo.

"BRO GERNE a hañval bezañ un unaded a zoare evit kas war-raok diorreadur (développement) kempouezet mat an ekonomiezh hervez ur steuñv (plan) ha krouiñ ar muiañ a blasou-labour nevez". Bro Gerne a zo anezhi ur seurt tachennad greantel vras gant Bro Vigoudenn, Douarnenez, Konk-Kerne, Rosporden. Ar c'hreiz anezhi a zo Kemper, diazezet war ar c'henwerzh hag ar merezh.

Ma ra ar CFDT ur seurt kinnig eo sur a-walc'h peogwir eo bet broudet gant enkadenn an implijou er vro, met ivez peogwir n'heller ket lavarout eo bet gwall e-fedus "kuzulioù lec'hel al labour" bet savet un tamm e pep lec'h, e Konk-Kerne, Pont'n Abad, Douarnenez, Kemper. Ar re-se n'o deus galloud ebet, alies-tre ned eont ket en-dro dre ma n'eus ket ur

youl gwirion da gas anezho war-raok, pe a-berzh ar batroned pe a-berzh an dud dilennet.

Kuzul Ekonomikel ha Sosial Kerne a vefe ul lec'h eskemm, kelaouiñ, met ivez ul lec'h divizout ha labourat evit ar re a ra war-dro ar vuhez ekonomikel ha sosial. Bez e c'hellfe bezañ ul liamm etre kuzulioù lec'hel al labour hag an aozadurioù rannvro. Mirout a rafe ouz ar gendivizerien d'en em serrif e-barzh o getoioù ha reiñ a rafe an tu dezho da gas war-raok oberiantizoù ekonomikel e-dia-barzh ar raktres pe ar steuñv rannvro.

Evel-se e vefe tu da welout en un doare resis an ezhommoù-labour, da anavezout pinvidigezhioù ekonomikel ar vro, da studiañ emroadur ar boblañs hag an industriezh (ar greanterezh), da sikour al labouradegoù diaesterioù ganto, da skoazellañ ar re a glask sevel embregerezhioù nevez.

## UN NEBEUT MENOZIOU EVIT MERAN GWELLOC'H AR VRO

Ouzhpenn-se e ra Unvaniezh Bro Gerne ar CFDT, un nebeut kinnigoù all :  
-Kontradoù-bro a c'hellfe mirout ouz ar broioù da vont da geveziñ an eil gant eben;

-ar porzhioù-mor a rankfe bezañ meret gant an holl a labour enno hag eveljust gant ar c'hopridi hag ar besketourien ;

-tachennoù evit an artizaned hepken a vefe savet rak pouezus-tre int evit krouiñ plasou labour ;

-tu vefe ivez da grouiñ kêrioù artizanelezh a-wechall o lakaat da dalvezout e-giz-se karterioù pe kêriadennoù kozh ;

-dav vefe, en ur vro e-lec'h ma vez fardet boued diwar al labour douz-ar, sevel tiez ispisial da virout an danveziou produet (salioù gant yenernez, skornerezed) evit ma c'hellfe an artizaned ober taolioù-esae arak sevel int o-unan ar salioù o deus ezhomm anezho.

-Gwellaat an hentoù hag an hentoù-houarn : da gentañ ar re bouezusañ war an dachenn ekonomikel (Pont 'N Abad-Kemper, pe Kemper-Douarnenez arak an hent bras etre Pont Kerne ha gour-hent Kemper-Naoned). Lakaat an tredan war an hent-houarn Kemper-Naoned ha Kemper-Roazon.

-Sevel un dachenn evit an dezougen (transport) evit an eskemmoù etre ar mor, an hent hag an hent-houarn.

-Krouiñ ur greizenn-studi evit ar pesketa.

-Krouiñ ul labouradeg evit treuzfurmiñ produoù ar mor dre m'emañ boazioù debrif an dud o cheñch.



# KEMPER EBET HEP HE FIJOU-PRI !

## dalc'het eo priañjou H.B.-HENRIOT gant ar vicherourien

D'ar sadorn 9 a viz Ebrel e oa un dezvezh "Doriou digor" e Ti H.B. Henriot. Divizet e oa bet gant ar vicherourien derc'hel al labouradeg, hag evit brudañ o stourm e oa bet pedet ar boblañs da zont d'he gweladenniñ. Etre 10 eur vintin ha 6 eur noz eo war-dro 3000 a dud o deus respontet d'ar c'halvadenn, o deus bet tro da welet penaos e vez graet ar priañjou, penaos e vezont livet, da gomz gant an implijidi diwar-benn o labour. Evit al lodenn vrasañ eus an dud e oa ar wech kentañ dezho kompren petra eo al labouradeg-se, penaos e vez labourer e-barzh, e-giz ma oa bet graet dija, un nebeut bloavezhioù 'zo e Ti Moulerezh Kerne.

Skritellougiou a oa bet peget un tamm e pep lec'h e-barzh ar stal, skrivet warno gerioù-stur a-bep seurt, e gallec'leg pe e brezhoneg evel "Kemper ebet hep he fiñjou pri".

gaset ouzhpenn evit meskañ ar pri pe treiñ ar podoù, korzennoù a zo bet lakaet evit kas ar pri betek al lec'h ma vez implijet, fornioù tredan a zo ivez evit poazhañ ar podoù, met gant an dorn eo e vez graet ar priañjou, lakaet pri e-barzh ar mouloù, livet hag emailhet pep oberenn.

## prizioù uhel evit oberennou a dalvoudegezh

Abalamour da-se ivez e koust ker ar priañjou. Unan eus an oberennou bravañ, ur violoñs fañs, a vez livet en ur ober dek eurvezh da skouer hag a vez gwerzhet 2500 lur ar pezh. Dibabet ez eus bet eta gant renerien Ti Henriot derc'hel da broduoù a live uhel gant ur still breizhat mod kozh, ar pezh a c'hellfe bezañ bremañ un tammig "Breiz-zhat retro".

## gwerzhioù o vont war ziskenn

## keleier diwezhan

Disadorn 16 a viz Ebrel eo bet kaset dirak al Lez-Varn gant ar Sindik ar re 'zo e penn micherourien Ti H.B. Henriot e Kemper, evit mirout outo da werzhañ priañjou d'ar sul 17. Divizet eo bet gant al Lez-Varn e ranke al labourerien paeañ 30 lur taol-kastiz evit pep gwerzhadenn. Daoust da se e vo graet ar gwerzh memestra. Fellout a ra d'ar vicherourien diskouez int gouestoc'h eget ar batronez a oa arak, da werzhañ ar stokoù a veze lezet da gousket e-barzh ar stal. (da heuliañ...)



## 208 plas-labour en arvar

A greiz-holl eo bet kaset kontoù al labouradeg d'al lez-vern a goñvers, da lavarout eo eo bet graet "dépôt de bilan" gant ar renerien. Perak ? Seurt doare d'ober a ro tu da lakaat al labourerien er maez hep kudenn ebet, rak neuze n'eus ket ezhomm ar sindig anvet da c'houlenn aotre ensellerezh al labour. N'eus riskl ebet neuze e vefe nac'het skarzhañ an implijidi pe lod anezho da nebeutañ. Diwar an 208 goprad ez eus aet kuit un nebeut dija war-du implijidi all -en ospital da skouer. Kaoz a zo bremañ da lakaat er-maez ur 80 bennek eus ar re a chom. Kenderc'hel a rafe neuze ar stal da vont en-dro o virout ar produadurioù uhelañ. Marteze zoken, e c'hellfe ar batronez adkemer o labouradeg ur wech kempennet an ti.

## fazioù mererezh

N'helle ket avat ar sindikad G.G.T. a zo e-barzh ar stal asantiñ da gement-se. Rak, ma anzav dileuridi al labourerien hag en o zouez, Youenn

Kumnel, ez eus diaestrioù gant ar priañjerezh, e tamallont ivez divarreghez ar renerzh da gaout ur gwir politikezh kenwerzhel : 95 % eus ar priañjou gwerzhet er c'hwec'hkorn a vez gwerzhet e Breizh, 30 % e Penn-ar-Bed ha 35 % e Kemper, d'an douristed e-pad an hañv dreist-holl ha 5% hepken a vez gwerzhet e Bro-C'hall. Koulskoude ez eus bet graet 23 % eus ar gwerzhad (chiffre d'affaire) er Stadoù-Unanet e 1981. Sur eo e vefe bet tu da glask marc'hadoù all, da skouer e Paris pe e broioù all estregat ar Stadoù-Unanet. Diouzh un tu all e vefe bet tu da glask ivez produoù still nevesoc'h dezho eget ar memes giz breizhat kozh, pa ne ve ken evit ar vretonez o-unan a garfe cheñch ivez un tammig.

d'ober 80 % eus koust ar produñ. Neuze, a c'houlenn an dud, ar batronez, an dud e karg hag ar sindikad zoken, perak ne vefe ket sikourioù evel ma 'z eus bet roet d'ar gwiaderezh ? N'eus respont ebet avat evit ar mare.

Ha ma 'z eus bet kaoz, tamm pe damm, e vefe adkemeret al labouradeg gant ar vicherourien dindan stumm ur c'hooperativ, ne seblant ket e vefe posubl e gwirionez. Gwall niverus eo ar vicherourien evit-se, n'int ket stummet a-walc'h na prest da gemer seurt karg c'hoazh, ha ne vo ket diskoulmet ar c'hudennou kenwerzhel ken aes a-se. Met prest int da zifenn start o flasoù labour.

Tangi Louarn.



Micherourien HB Henriot o telc'her al Lez-vern-Koñvers

## unan eus labouradegou koshan breizh

Abaoe ar bloavezh 1420 e farder priañjou e Lokmaria e Kemper. Hag an ti a zo bremañ H.B. Henriot a zo bet savet o lakaat asambles an div labouradeg a oa gwechall H.B. hag Henriot. Da gentañ e teue ar pri eus ribloù an Oded, eus al lec'h anvet "Toull Wenn" e Menez Bili. Met bremañ e vez lakaet da zont eus Bro-C'hall, eus departamant ar Marne, e-barzh seier, prest da vezañ implijet. An elfennoù anezhañ 'vez mesket a arak da vezañ gwerzhet d'al labouradeg.

Moarvat ne cheñch ket kalz an doareoù labourat e-keñver ar pezh e oant gwechall. Mekanikoù tredan a zo bet de-

Moarvat ne oa ket un dibab fall klask gwerzhañ produoù a dalvoudegezh war ur marc'had e-lec'h m'eo re vras ar c'hevezerezh gant traoù a-bep seurt ha marc'hadmat o tont eus broioù an Trede Bed. Koulskoude, m'eo aet war gresk un disterañ chifr ar gwerzhioù er bloavezh 1982, eo aet war-du an traoù ar c'hementad : 10 % nebeutoc'h eget er bloavezh 1981. Tra ma veze produet 45 000 ar bloaz, e yae eveljust ar stokoù war gresk. Kreskiñ a rae neuze kargoù ha frejoù ar stal. Hag adalek nevez amzer 1982 ez eur krog da zigreskiñ an eurioù labour betek 32 eurvezh ar sizhun. Daoust da-se eo aet stad an traoù war washaat hag eo bet lakaet mererezh an ti etre daouarn ur sindig gant al lez-vern a goñvers d'an 12 a viz Ebrel.

N'heller ket lavarout forzh penaos eo goprou an implijidi o deus kaset ar stal d'an traoù pa weler da skouer ne c'houneze ul livour o labourat er stal abaoe 39 bloavezh nemet 4 300 lur net evit miz Meurzh 1982 ha n'eus nemet tri pe bevar micherour all o c'hounit kement hag eñ. Koulskoude ez eo anat diaestrioù seurt labouradegoù e-lec'h ma ya ar goprou hag ar c'hargoù

## Ti-Krampouezh BAR

«chez  
tom»

18. st. an Itron Vari

29 260 Lesneven

83 15 14

evit anaout  
gwelloc'h Iwerzhon  
«IRLANDE LIBRE»  
KELEIER MIZIEK  
170 Keller 75011 Paris  
KOUMANA NT  
60lur war anv A. MONOT

# OC : YEZH OFISIEL

Ne oa ket gwall blijet ar Gatalaniz gant ar mod ma oa bet troc'h et o departamanchou dezho, Lleira, Girona, Barcelona ha Taragona, bet treset da vare ar c'hozh Franco (n'eus ken 'met Doue da bardono !). Ar re-se ne zalc'hont tamm kont ebet eus poblañs, buhez hag istor ar vro. Heñvel-mat eo e Breizh en deiz a-hiziv (Breizh ar 4 departamant, Bro-Redon etre 56,35 ha 44).

Dibaoe ma'z eus bet rentet un tamm deus he galloud da Bro-Gatalounia, en em gavont un tamm muioc'h en o aes e vit ober war-dro o aferioù dezho o-unan. Sed ha deut eo da soñj da parlamant ar "Generalitat" lakat da dalvout en -dro an troc'h e broioù bihan, "comarques" e yezh ar vro, a oa bet laket e-barzh al lezenn da vare en eil republik, tro 1936.

## doujans

Displeget en deus Macià Alavedra hag a zo bet fiziet ennañ kas tres (projet) ar broioù bihan -se da benn, penaos e vo doujet ive da boblañs ar stankenn Aran (Val d'Aran) ha n'eo ket katalanek he yezh, oksitanek ne laran ket. Rak ur stumm eus oksitaneg ar pireneou an hini a brech an dud eno.

"Kaozeet 'zo bet gant kuzulierien ar stankenn, ha gant an holl gostezennoù politikel, ha goude klevet oc'h alioù e kinnigomp un tres hag a ziazez ar c'huzul jeneral hag ar "sindic" en dro, hervez an Istor. Ober war-dro kelenn ar parlant aranek a raio ar re-se, e-touesk ar pezh a sell deuzouto.

-diwar Avui, kazetenn gatalanek 30.1.83

Mont a raio ar yezh -se da ofisiel, nemet lod eus an Araniz a skrivo e yezh hervez doare-skrivañ ar c'hatalaneg, lod all hervez hini ar c'hastilhaneg, pe hervez o mod dezho o-unan c'hozh.

## doare skrivan unvan

Savet 'zo bet, neuze, evit diskoulmañ kudennoù skrivañ ur yezh ofisiel, ur gomision he deus klasket, studiet ha dibabet, a-benn ar fin, an doare gwellañ da skrivañ an "araneg". Diwar an 12 den a yae d'ober ar gomision e oa 3 o tont eus tu all an harzoù. Gout a ouie ar re-se ken brav hag ar re all, sur-mat, ne oa an aranez nemet ur stumm eus oksitaneg Bro-Waskogn. Sed ne voc'h ket souezhet ive o teskiñ ez eus bet kemeret ur stumm eus an doare skrivañ klasel oksitaneg, an

tostañ ar gwellañ eus yezh Val d'Aran, met tost ive neuze ouzh oksitaneg Bro-Waskogn. En doare skrivañ-se an hini eo e c'haller lenn kement tra a vez embannet gant an IEO (Institut d'Estudis Occitans), an EOE (Escola Occitana d'Estiù) pe kazetennoù a-bep seurt, evit al lennegezh, ar barzhoniezh, ar studioù-yezh hag all, e kement korn eus Bro-Oksitania, hag a zo ledankaer (31 departamant, un drederenn eus tachenn ar c'hwec'hkorn).

Ul levrig a zo bet embannet gant komision ar yezh a zo bet kaset da gement familh o vevañ er stankenn. Kavout a rae ennañ penaos skrivañ, listennad an holl gêrioù hag un nebeud skridoù lennegezh, ouzhpenn ur pennad skrid da zisplegañ ar rak hag ar perak eus an doare-skrivañ nevez-se.

Diskouezet he deus ar "Generalitat" koulskoude, e ouie kas c'hoari an emrenezh betek ar penn pellañ. Ur skouer eus an dibab, eta, an hini eo, n'eo ket hepken evit ar stadoù bras na reont foute-kaer c'hoazh gant kultur ha yezh ar pobloù bihan o vevañ enno, met evit tud all ive, me 'bari, e broioù bihan gwasket, a soñj dezho e ranko mont ar maout gant o yezh diwar waskañ pe lazhañ ar yezhoù bihannoc'h evit o hini.

Joel Donnat.

arme :

## PROSEZ

### DISENTERIEN AR MIB

(Roazhon, d'an 29 a viz Meurzh)

**E**chu gant an TPFA kozh, abaoe miz Genver gant ur Gambr karget d'ober war-dro an aferioù-soudard eo e vez barnet hiziv Youenn Chaillou ha Yannig Becheneg, Naonediz, disenterien ha broadelourien eus ar MIB, en toull e Roazhon abaoe miz Kerzu 1982. Peseurt nevezinti eta hiziv, evite hag evit ar re deut d'o skoazellañ dirak ar justiz ?

## breutadeg publik

Ur bern archerien e ti-kozh Breujoù Breizh met lezel a reont an dud da vont e-barzh : n'eo ket evel a-raok. E penn un trepas, un nor serrat diwallet gant bugale Marri-Robin : n'eus ket tu da dremen, evel a-raok. "Leun eo ar sal", (evel boaz) eme unan medalenet. "N'eo ket gwir !" eme ur paotr o tont ermaez eus sal al lez-varn, e penn all an trepas, hag ar c'hortozerien da yudal. Ur plac'h a zeu a-benn da dremen, a vo adkaset gant un taol dorn e-mesk an hoperien. Tamm ha tamm, ha daou-ha-daou, e teuo a-benn an darn vrasañ eus an dud da dizhout al lez-varn a-raok ar fin.

## disrannerien

"N'eo ket disenterien hepken emaoch o vont da varn", eme Youenn Chaillou d'ar prezidant Deloureur, "met disrannerien. Bretoned omp, n'eo ket Gal-laoued, n'hon eus tra da ober gant Bro-C'hall hag hec'h arme. Ha n'anavezomp ket he justiz".

13 test zo. An hini brudetañ, Alan Stivell, a lar e vez komzet div yezh estren e Langoned, ar saozneg hag ar galleg, a gomzo ivez eus "gwir ar pobloù d'en em ren o-unan". Alan Corraud, bet ivez prizoniad en anv ar MIB, a gomzo eus ur Vro-C'hall hañval "ouzh he Fuzenn Arian, he lur gall, he linenn Maginot, he justiz kozh-kabac'h". Ar prezidant, war-dro 60 vloaz, ne vour ket tamm.

Bertrand Collichon, 54 bloaz, kazetenner e Naoned, a ziskouez ar medalennoù en deus gonezet en Indez-Sina hag en Aljeria, ha mezh gantañ bezañ graet, a ro anezho d'ar prezidant n'oule ket dioute.

Bernez Boulc'h, eus Brest, n'hall ket komz : tapet eo bet un toullad deizioù a-raok, o pegan skritelloù, pa oa klask warnañ gant an arme. E gamarad J.F. Bidault, eus Roazhon, a laro ez eus ivez klask warnañ.

## galleg mar plij

Bernez Korbel hag Herve Kerrain, bet disenterien ha prizonidi ouzhpenn bloaz, n'hallint ket bezañ klevet e brezhoneg, evel e-pad o frosaz dirak an TPFA kozh. Splannat nevezinti ! Komzoù Yann Chouk, an alvokad ne servijint da netra.

Ar prokolor, a c'houlenn 12 miz evit o servij hag 8 evit an nor drailhet gante en toull-bac'h.

D'ar 26 a viz Ebrel e vo embannet ar varn-digezh.

## prizonidi nevez

Goude ar prosez e yelo un 20 bennak a dud da stankañ an hent, dirak dor an toull-bac'h, d'ar c'hirri-archerien. Kann a vo, ha 4 archer vo gloazet. 4 den yaouank a vo harzet ha 2 anezhe tamallet evit an taolioù : Yann-Ber ar Mat, 31 bloaz, eus Landerne, a oa "dindan evezh al lezenn" evit un afer armoù ha danvez-tarzh gwall luziet, ha J.F. Bidault, 33 bloaz, disenter abaoe miz Kerzu. Dalc'het e vint en toull ken e vint barnet.

Mark Kerrain

## PROSEZ

### AR VANIFESTERIEN

Roazhon, d'ar 6 a viz Ebrel. Un hir a brosez, kroget d'ar Merc'her da 15el5, echuet d'ar yaou-beure, da leur 10. Hervez an archerien int bet taget gant Ar Mat ha Bidault Hervez ar vanifesterien int bet taget gant paotred Mari-Robin, pa oant deut da saludiñ an disenterien dirak dor an toull-bac'h.

Bidault en doa ur seurt penn-bazh plegus gantañ en e zorn, hervez un archer, en e c'hodell hervez unan all. N'eus forzh ! miz toull-bac'h evitañ, ha kemend-all evit Ar Mat, evit bezañ kignet ur fri archer. Ha 2000 da bep hini eus an daou archer o doa gloazet.

M.K.

# DEVEZH AR VRO , DEVEZH STOURM !



(Maule, d'ar Sul 4 a viz Ebrel)

**A**r gerioù-se a c'halled lenn un tamm pep lec'h, war vegerioù kêrbenn (vihan) Zuberou, a veze lidet enni, da Sul Fask, an Aberri Eguna, Devezh ar Vro, dindan ar glav bras.

Ar gouel-se, a vez lidet en Iparralde (Euskadi an Hanternoz) abaoe un 20 vloaz bennak, da Sul Fask, a zo bet savet da gantañ e 1932 er C'hreisteiz. Betek 1977

eo bet lidet a bep eil er C'hreisteiz hag en Hanternoz evit ar 7 proviñs. Abaoe e vez lidet en daou du d'an harzoù, hag er C'hreisteiz e tri lec'h disheñvel, gant tri strollad politikel disheñvel : Herri Batasuna, Euskadiko Eskerra, hag ar PNV.

E Maule e oa aozet ar gouel gant 4 strollad : "Herri Talde", "Iaguntza", "Eibat", hag ar "C'huzul-Skoazell da Xabier Manterola" (prizoniad politikel e Mont-de-Marsan da vezañ bar-

net e Poitiers) ; ha laketa ar pouez gante war an tri zra-mañ : 1) Zuberou zo unan eus an teir rann a ya d'ober Norz-Euskadi, 2) Kinnig un diskoulm all estreget hini ar "pennoù bras", 3) Diskouez an Unaniezh gant Kreisteiz-Euskadi o lidañ ivez an Aberri Eguna.

En nozvezh a-raok ar gouel e voe graet un tamm euskarekaat da gêr Vaule. gant liv war ar panellou-hent (Maule, e-lec'h Mauleon) hag an tiez-bank (Xabier Aska, Xabier dieub).

D'ar Sul vintin e voe manifestadeg e kêr gant ur 1.500 a dud o kanañ hag o huchal en euskarek. Un nebeud Gwianiz ha Bretoned (eus "Emgann") a oa ivez en o zouez.

Goude kreisteiz e voe bodet an dud er jai-alai, an ti bras ma vez c'hoariet pilota, da selaou prezegennoù e galleg hag en euskarek, gant kement strollad a stourm en Norz-Euskadi. An hini a voe ar muiañ stlaket an daouarn dezhañ avat, a voe paotr Herri Batasuna, deut eus an tu all, a lakaas an holl da yudal "Independenzia !"

Mark Kerrain

# STROLLAD KARAEZ



War ar sizhun e labouromp ivez a-wechoù, a-stroll pe pep hini diouzh e du, da renkañ ur pennad pe da studial al leurennadur evit ur pennad. Un dibenn-sizhunvezh labour a vez aozet ivez ur wech dre vare.

## Kudennoù arc'hant ho peus ?

Evel just e vez kudennoù arc'hant ganeomp dre ma ne vez ket gounit gwall alies. Ha koulskoude hon eus kalz frejoù. Bet hor boa bet ar-

milion evit Strollad ar Vro Bagan, kement-all evit Strollad Brest (Penn ar Bed), hag ur milion da Strollad Plougin. Ni, avat, n'hon eus bet gweneg ebet ? Perak ? Peogwir emaoomp gant Strollad Ti an Holl (a-gleiz), hag harpet gant kêr Garaez, en he fenn ur maer komunour J.P. Jeudy ? Gwelet e vo ! Skrivet hon eus da gaout displegadurioù : a-benn miz Ebrel e vo un eil bodadeg.

maez o ziez gant traoù e brezhoneg, ha n'eo ket c'hoariva hepken evel just. Mat e vefe kaout muoc'h a darempredoù gant strolladoù ar re gozh ha strolladoù a bep seurt.

## Petra e dalvez deoc'h ober c'hoariva e Brezhoneg ?

Un doare plijus eo evidomp, hag evit ar selaouerien ivez (spi hon eus d'an nebeutañ), da gas war-raok ar stourm evit ar brezhoneg, hag ivez da roiñ hor soñj war an dazont war kement tachenn a zo. Klask a reomp kinnig soñjoù nevez war ur gundenn bennak en ur mod divoutin, hep ober pre-

## Pelec'h eman ar strollad e Karaez ?

Emañ Strollad Karaez e-barzh kevredigezh "Ti an Holl" e Karaez, hag e labour ganti a-hed ar bloaz. Aboae ar penn kentañ, pe dost, ez eus bet kinniget deomp gant Ti an Holl, ur sal sinema ne servije nemet ur wech dre vare. Bloaz 'zo eo bet renevesaet ar sal-se ha bremañ e vezomp o pleustriañ en ur sal e Ti an Holl. Abouez eo evidomp bezañ e-barzh kevredigezh Ti an Holl ha kenlabourat ganti.

walc'h liammañ ar penna-  
doù etreze.

Pezhioù all a zo bet savet gant unan bennak eus ar strollad pe gant an dud o-unan, war soñj unan bennak. Pezhioù a stourm e vezont peurvuiañ. E-giz-se eo bet savet "Soaz ar Yodkerc'h" ha "Soubenn al laezh" er bloaz-mañ.

## Penaos e labour Strollad Karaez ?

N'en deus den ebet er strollad, ur rol ispisial evit ar pezh a sell al leurennadur. Skrivet 'vez ur pennad ha c'hoariet : neuze e ro pep hini e soñj war an doare da renkañ an tamm-se hag e vez reizhet.

Betek-hen hon eus bet graet bep bloaz war-dro ar c'hinkladurioù hag an dilhadoù. Er bloaz-mañ e vimp harpet evit ar pezh a sell an dilhadoù gant tud a-vicher ha n'emaint ket o c'hoari ganeomp. Graet e vez ar c'hinkladurioù gant tud ar strollad a c'hall pe a c'houl ober anezhe.

Emaomp c'hwec'h bremañ e-barzh ar strollad. N'eo ket trawalc'h. An nebeutañ e vezomp ar muiañ a labour a vez d'ober. Spi hon eus e teuo tud all d'hon harpañ. Bep Sadorn e vez pleustradeg goude lein e-pad peder eur war-dro.



c'hant gant ar "garta sevenadurel" e-pad daou vloaz ; un harp bras eo bet evidomp hag e oa bet prenet ganeomp gouleier, binvioù all hag ur gamionetenn... Un harp bihan en devez Ti an Holl evit hor strollad.

Er bloaz-mañ hon eus graet ur gouleenn digant ar c'huzul departamant. D'an 23 a viz Du e oamp pedet war-un-dro gant un nebeut strolladoù c'hoariva brezhonek da studial "stad ar c'hoariva brezhonek". Genou bras e oa un tamm J.Y. Cozan, an den kiriec eus ar gomision, pa brometae da bep hini ac'hanomp un tamm mat a arc'hant.

Meur a strollad en deus bet goprou er bloaz-mañ e giz-se : 4

pep lec'h, emañ ar football ar roue bras e-barzh ar vro. Ne vez ket an disterañ kudenn arc'hant a-benn ma vez divizet, memes gant ur barrez vihan, aozañ un dachenn-foot (ugent milion hag ouzhpenn).

Amañ eo bet kentoc'h ar c'hustum kantañ istorioù, marvailhoù, kentoc'h evit sellet ouzh pezhioù c'hoari. Ne deu ket stank-tre an dud da welet ac'hanomp.

## Gant peseurt kudennoù sevenadurel ec'h en em gavit e Kreiz Breizh ?

N'eus ket kalz buhez sevenadurel breizhat e Kreiz Breizh. Emañ marteze c'hoazh an diouer a labour er vro o c'hoari a-enep deomp. Skol vrezhonek a vez ganeomp e Karaez, e Landele. En Uhelgoat hag er C'hastell-Nevez ez eus bet, met ne vez ket ken. Ouzhpenn-se n'eo ket gwall fier an dud dre emañ gant o yezh : emañ c'hoazh soñj ar simbol e-barzh o fennoù.

## Penaos emaoch'o sonjal ober evit gwellaat stad ar c'hoariva e Kreiz Breizh ?

Klask mont da c'hoari aliesoc'h eget na reomp bremañ. A-bouez eo e vefe abadennoù e brezhonek a bep seurt alies er parrezioù, da glask sachañ an dud e-

zegennoù, hag en ur farsal alies. Ar vuhez pemdeziek, an traoù farsus, laouen, pe drist, a vez enni a vez dav skeudenniñ en ur mod all, d'hor soñj, evit ma ne vo ket enoet an arvesterien. Marteze eo se an diaesañ : arouezñ en un doare sklaer ha dedennus ar vuhez pemdeziek.

## War beseurt pezh emaoch'o labourat ?

Er bloaz-mañ emaoomp o labourat war ur pezh nevez savet diwar ar gontadenn anavezet mat dre emañ "istorioù Yann al Laer". Troioù kamm farsus Yann Seitek a roimp tro d'an dud da welet... Ur spered disheñvel hon eus roet da Yann al Laer diouzh ar pezh eo bet marteze. Laerezh a ra ar re binvidik, mont a-enep an aotrou Kont... Gant Dispac'h ar Bonedoù Ruz e echu ar pezh.

O pleustriañ emaoomp war ar pezh-se bremañ, hag un nebeut sketchoù a-hend-all, evit c'hoari er stajoù, pardonioù... gouelioù, tiez ar re gozh.

Setu emañ hon chomlec'h evit ar re o defe c'hoant kaout displegadurioù, pe goul diganeomp mont da c'hoari : Strollad Karaez, Ti an Holl, 36 strada an Iliz, 29270 Karaez.

## Pegoulz eo bet savet ar strollad ?

Er bloavezh 1976 eo bet savet ar Strollad. Er strollad e oa neuze Goulc'han Kervella, Anna Vari Trellu, Maï-Soaz ar C'hozh, Jakez ar Borgn, Martine ar Gwen, Yann-Glaoda Kefeleg, Marie-Louise Heydon ha Tremeur Bourles. Er bloavezhioù war-lerc'h eo kresket ha digresket tro-ha-tro niver ar c'hoarierien. An abeg da se eo marteze an diouer a labour e-barzh ar vro : setu e vez distabil a-walc'h o labour war dachenn pe dachenn e gwirionez, pa rankont mont a-gleiz hag a-zehou da glask labour. Ne oa ket gwirizennet an dud e-barzh ar vro.

Un abeg all c'hoazh : kalz e vez dav labourat a-benn dont a-benn da lakaat war-sav ur pezh-c'hoari, hag un tamm mat eus hon amzer a vez debret gant ar c'hoariva.

## Peseurt pezhioù a zo bet diskouezet d'an dud ?

Ul lod eus ar pezhioù-c'hoari bet c'hoariet ganeomp a zo bet troet diwar ar galleg pe ur yezh all, gant tud eus ar strollad e-giz "Fiknik 'pad ar brezel", pe "Marion ar Faouet". Evit ar pezh-c'hoari all hon eus ranket adkompenn ar pezh dre ma kavemp pennadoù hir-mat. An diaesañ a vez alies a-



UR PENN-DEVEZH gant

SUSAN GEORGE



**A**n Oriant -Da geñver an "Assises Régionales de l'agro-alimentaire", dalc'het en Oriant d'an 19 a viz C'hwevrer, e oa ouzhpenn 300 den o selaou a-bep seurt prezegennoù gant J.Claude Pierre, Susan George hag all. Ur c'hroazhent e oa neuze, un emgav evit an holl strol-ladoù (SEPNB, CRISLA, CRIDEV hag all) pe hiniennoù. Amañ e oa tud eus "Terre des Hommes", "Tra-vailleurs-paysans", FDSEA "1% Tiers Monde", kalz deuzouto a oa o selaou an Amerikanerz yaouank, Susan George. Leun-chouk e oa ar sal, daoust ma oa emvodoù all kinniget er memes amzer.

er stadou unanet

Kaozeet he deus SG. eus al labour-douar en USA, hep disoñjal ober al liamm gant al labour-douar amañ. Diskouezet he deus peseurt mod e oa kreizennet pep tra eno: al labourerien, an arc'hant, an douar.

-5 % eus al labourerien-douar a zalc'h 50 % eus an douar.  
-50% eus al labourerien-douar a zalc'h 5 % eus an douar.

Da skouer en 1978 -820 atant a zaspugne 10 % eus gounid labour-douar ar vro,  
-4440 atant war-lerc'h a zaspugne 20 % eus ar memes gounid.

Kreizennet-tre eo ar marc'had a ra war-dro produioù al labour-douar (4 stal vras oc'h emel-lout er boued skornet,

ar bara...) ar pezh a lak ar prener da ziyalc'hañ 10 % muioc'h peogwir n'eus ket kevezerezh (koñkurañs).

Muioc'h-mui e vez graet eno dre gontrajoù. Staget e vez e-mod-se ar produer ouzh ar gwerzher. Da skouer, 100 % deus marc'had ar sukr, 80 % deus hini al laezh hag an traoù dre laezh, 100 % deus hini ar yer a vez dindan kontrajoù. Dre holl eo ouzhpenn 70% eus an eskemmoù a zo renet e mod-se.

Staget e vez c'hoazh ar produer met dre an tu all an taol-mañ. Debret, lonket e vez bep a damm-g ar broduerien. Kin-niget e vez dezho labour-rat muioc'h-mui gant ke-

vredigezh-mañ-kevredigezh. Ur wech paseet ar mare kentañ, an hini gwellañ, ur wech staget mat al labourer-douar d'ar gevredigezh, e vez goulennet gantañ gwellaat e vevanikoù ur bloavezh, servijañ boued tomm d'e yer an eil bloavezh, hag all, hag all...

Gwelet 'vez ar staliou bras o lezel un dachenn bras ar riskloù enni d'al labourerien-douar. Lezet e vez dezhañ an dachenn met en nasket mat mestra. N'eus ken 'met un nebeud kevredigezhioù ne reont ket e-mod-se atav. Coca-Cola a brodu e avaloù, e orañjez, Del Monte lod eus e frouezh hag e legumaj.

A-bouez bras eo al labour-douar evit gouarnamant ar Stadoù Unanet. Degas a ra 1/5 eus enke-fadurioù ar vro. Ne chom dezho nemet al labour-douar a-benn (pa) anzav

ar gouarnamant kaout di-aesterioù gant broioù Europa pe bro-Japan war an tachennoù all, an teknikoù da skouer. Dav eo dezho gwerzhañ o boued ha gwerzhañ ker. An dre-se 'zo kaoz ez eus etre an USA hag an OCDE ur brezel ken start war dachenn ar boued ha ma 'z eus etre an USA hag an URSS e-keñver ar politikerezh. Dispignet e vez tost ar memes kont arc'hant en USA evit si-kour produiñ maiz ha soja eget an estrenvro hag en Europa evit klask difenn he labour-douar.

An USA a zo o klask ledañ dre ar bed o mod d'en em vagañ, da broduiñ. An holl re a zo gouest d'en em vagañ a glask bevañ er mod "amerikan". Ma klask broioù europad d'ar c'hontrol evit ma klask difenn he labour-douar. Riskl bras a zo evito, ha dreist-holl evit tud paour an holl vroioù-se.

20 milion a dud a vez gwall-vaget. A-raok Reagan e oa 10 milion dollar ar bloaz hag a yae da vagañ re baour ar vro.

Da zont ar bed e-keñver magadurezh an hini 'zo dalc'het gant an U.S.A. Evit ar wech n'eus ket bet tud a-walc'h o labourat holl zouereier ar vro. Da vare ar re wenn oc'h aloubiñ e veze roet 120 devezh-arat da bep hini. Sed e veze dav kaout mekanikoù dre ret. Bremañ c'hoazh e vez kentañ e-fedusted al labour-douar amerikan dre zen o labourat ha pas

dre zevezh-arat, peogwir ez eus kalz a vevanikoù gant pep den, ha nebeud a dud. Peurvuiañ, avat, e vez ar c'hontrol en Trede Bed e-giz m'eo bet evit Europa. Kalz a dud gouest da labourat a zo hagun nebeut plas da bep hini. An doareoù-labour ha bevañ n'int ket heñvel. Degas mekanikoù d'an 3de Bed a zo bet un diskoulm da gudennoù 'zo e-barzh broioù 'zo mes ne dalveze da netra abenn n'eo ket ar memes kudennoù a vez da ziluziañ e lec'h all. Degas a rae gwerzh d'ar staliou amerikan ha setu tout. Setu pal gwirion an "dispac'h glas".

embargo

Embargo 1973 war ar soja en deus talvezet d'ur gentel da vroioù Europa. Kresket e oa bet priz ar soja betek 6 gwech (2 zollar ar sa-c'had betek 12 dollar), dre ma wele an U.S.A. o berniad soja o vont bihan. Kalz en doa prenet an U.R.S.S. ar bloavezh-se hag ar bleud pesked n'en doa roet netra. Folliañ o doa graet an Europiz dirak ar priz hag ivez o welet, e oant stag ouzh an U.S.A. evit ar boued-loened. Digresket en deus priz ar soja dibaoe (5,6 dollar ar sa-c'had) mes emañ bremañ an Europiz o klask bezañ emren.

dispac'h glas

Ma seblant an "dispac'h glas" bezañ e-fedusted ez eo ablamour ne vez ket dalc'het kont eus tout ar mizoù.  
-E-keñver ar yec'hed, koulz yec'hed pep hini hag hini ar bobl. Hervez ar senad U.S. e-unan e vefe digresket deus 1/3 ar mizoù-se ma'n em vagfe gwelloc'h an dud. Muioc'h a zruzoni, a sukr a vez e-barzh ar boued bet labourer kalz hag a vez servijet deomp bremañ muioc'h-mui.

-E-keñver an energiezh.

Ma vefe ledanaet ar sistem U.S. da holl dud ar bed (4 milion a dud) e vefe riñset holl binvidigezh an douar dindan 11 vloavezh. "Lonkañ" a ra pep amerikan 1400 litrad eoul-maen ar bloaz evit bevañ.

-E-keñver ekonomiezh. E-mañ an douar mat o vont da goll. Kollet e vez gant an amerikaned div wech muioc'h a zouar mat evit ma vez eostet a so-ja.

-E-keñver ar gouennoù legumaj. N'eus ket a ouennoù gwir. Gwan-tre eo ar re bet krouet gant mab-den. Derc'hel a reont 10-12 vloaz a-barzh bezañ taget gant kleñvedoù ha c'hwiled a-bep seurt. Dañjerus-tre eo gwelet ur seurt unvaniezh a-benn e ouzomp n'eus nemet 4 seurt gwinnizh e Bro-Ganada, 2 seurt piz bihan en USA. Unvanet e vez al labour-douar dreist-holl ablamour d'ar c'hontrajoù. Klasket e vez kaout ur seurt frouezh nemetken, azv d'ar memes mare evit ma ve aesoc'h d'ar c'hevredigezhioù, d'an uziniou.

-E-keñver an dud o-unan. Dav eo bet adlojañ 4 milion a dud dibaoe 1930.

Ouzhpenn ar brezegenn-se a oa, sur. Ar pouez hon eus lakat ni war hini Susan George dre ma oamp hon daou o selaou anezhi. Dedennus eo bet ur seurt devezh war meur a boent : roñ d'an dud da welet, da glevet traoù sklaer ha komprenus, roñ dezho an digarez d'en em anavezout gwelloc'h, ha da eskemm o mennoziou diwar-benn ar mod da labourat an douar met ivez ar mod da vevañ e Breizh. Pa vez gwelet pegen pouezus eo al labour-douar en hor bro, na pan e tigresk bemez niver ar piasoù, ha pegen bras eo plas ar boued en hor buhez, ez eo mat deomp gouzout ez eus tud o 'n em soñjal war ur mod all da vevañ.


Y.F. Jacq- F. Mandon.



**KINNIG LABOUR** : Klask a zo war-lerc'h ur (g)werzher(ez) skiant prenet gantañ(i) hag o komz Kembraeg, Saozneg, Alamaneg, Galleg, evit mizioù Even, Gouere, Eost ha Gwengolo 1983. Skrivañ pe pellgomz d'ar : BED KELTIEK- 2, straed Ar Roue Gradlon- Kemper- Pellgomz (98) 95.42.82.



An timbr-karr adarre... hag erfin



M'ho peus lennet "Bremañ" miz Genver (niverenn 16) e ouvezit em boa termenet chom hep paeañ ma zimbr-karr evit ar bloaz-mañ hag e voen o c'hortoz bezañ tapet gant Paotred Mari-Robin. Ac'hanta ! N'on ket chomet trunkil gwallbell. Ar re-se zo tud fin en o zouesk : harzet evit ar wech kentañ e-kichen Roazon ha souezhet kaout jandarmed ken hegarat ha ken komprenus... gwell-se ; evit an eil gwech e Rosko gant ar valtouterien, cheñchet an ton dañs gante met deut a-benn, koulskoude, da zisplegañ ma fezh soñj hep re a ziaezamantou.

Sañset e vo kaset an afer dirak lezvarn Kemper. Den ne oar pegoulz ez-resis, e miz Mezheven emichañs. Met kalz aferioù vo barnet e-korf an devezh-se. Neuze e

c'houlennan diganeoc'h, lennerien hag emsaverien dont niverus d'al lezvarn : peadra da denañ ar brasañ gounid diwar an darvoud-se, da ziskouez hon bolontez gant trouz.

Rak ar stourm-mañ n'eo ket nemet gounit ar vignetenn divyezheg an hini eo, met ar stourm evit ur Vreizh divyezheg penn-da-benn: ar skolioù (skolioù mamm ha kentañ derez da gentañ penn), ar panelloù henchañ, ar velestradurezh ha me oar me.

Dimp da c'houlenn ur politikerezh gwirion evit hon yezh, hag evit-se n'eus nemet un doare: pouezañ war ar reoù zo ar galloud gante.

Dimp-ni da vont war-raok ha diouzhtu...

Herve ar Bihan  
S.A.E. GWENED.

# LIDAN TREC'H BALLON

Al lastez, an drez a oa o c'holeiñ ar groaz vihan, e-kreiz ar prad. Un nebeut saout o peuriñ en-dro dezhi, ken diseblant hag an dud. Merkañ a ra an tamm-maen-se, emichañs, ez eus bet tud o vervel amañ.

Aroueziañ a ra an doujañ zo da gaout ouzh o c'heñver. Nepell alese ez eus ur skritell a lenner warni : "La bataille".

E lec'h all e vije bet kavet eno, tonennoù a vaen-greun, a vaen-marbr, evel evit enoriñ n'ouzon peseurt "den bras", ur jeneral, pe ur politikacher bennak, komzoù flour ha touellus gantañ eleizh e c'henou. Amañ, n'arvester nemet ouzh an natur, e seblant bezañ chomet hep kemma abaoe mil bloaz. Ha gwel a se, marteze. Rak petra gaeroc'h da desteniañ hollbadusted hon fealded ? Petra welloc'h da glotañ gant hon trivliadenn, pa sellomp ouzh ar prad bihan-se evel ouzh un dra bennak sakr ha kevrinus ?

Hevlene e vo lidet trec'h Ballon d'ar 26 a viz Mezheven, e Baen, e-kichen Redon. Ha peb bloaz, diwar vremañ, e kinnig ar gevredigezh "Breizh 845" lidañ an devezh-se en un doare dereat.

Perak derc'hel soñj eus ur seurt darvoud c'hoarvezet ouzhpenn mil bloaz zo ? Perak mennout gouestlañ un dervezh da gounaat ? Peseurt talvoudegezh a c'hellfe bezañ hini an dervezh-se ? Ha talvezout a ra ar boan aozañ ur seurt lid en deizioù a hiziv ? Ha ne vo ket ur blaz breinet gantañ, c'hwez ur vroadelouriezh a-zivwar-lerc'h en e dro ?

Beb bobl war-c'horre an douar a vez boas da baouez gant he c'herzhadenn, bep ar mare, evit teurel ur sell war he c'hiz araoch kenderc'hel gant hec'h hent. Neuze, ne vefe nemet Pobl-Vreizh oc'h ober fae war

Pegen iskis eo emzale'h difennerien sevenadur Vreizh, kenkouls e vefe dezho strivañ da leuniañ gant dour ur garter toulet-holl. Rak da belec'h e yelo ar brezhoneg ma n'eus ket a Vreizh evit e zegemer ?

Diaes eo din krediñ avat n'eus ket an disterañ karantezvro er Vretoned ar muiañ "enep-broadelour".

Penaos e c'hellfe Pobl-Vreizh adkavout fiziñs en he dazont broadel, m'o deus aon ar re a zo e penn ar stourm sevenadurel da vezañ Breizhiz "penn da benn" ? Ha fae a reont war hon Istor, evel ma ne vefe ket ul lod eus hon sevenadur ?

Perak ne zeufe ket dervezh lid Trec'h Ballon, "Dervezh ar Vro", ur pont etre "hon dec'h" hag "hon war-c'hoazh", un digarez d'an holl re a zo o labourat war dachenoù disheñvel da gejañ, un digarez da glask un unvaniezh a-us da gement chape-liñ, ken strizh ha diefedus an eil hag eben.

E pelec'h kavout un unvaniezh, ma n'eo ket e-barzh hon c'harantezvro ?

Evel-se e c'hellfe kaout an dervezh-se un dalvoudegezh, a-hend-all ne servijfe da netra, eveljust, kounaat evit plijadur an amzer drement.

Ret e oa d'unan bennak tresañ ur banniel breizhat evit aroueziañ hon bro. Ar Vretoned o doa ezhomm anezhañ. Ret eo, bremañ, sevel ur gouel broadel evit ma savo Breizh da vat an deiz bennak. Ezhom hon eus anezhañ ivez. Un arouez hepken e vo, gwirvoud avat e c'hell dont da vezañ. Rak da zibab hon eus : klask sevel ur vro nevez, pe gouzañ ur bed kozh betek diwez hon buhez.

Devezh ar Vro a vez aozet gant "Breizh 845", Loik Camus, Le Temple, Carentoir, 56200 Ar Gasilhi.

E. Granville

## GOUREN DISTAG



D'an dregont a viz Meurzh en em gave tud bodadeg arc'hourennerien FALSAB e Paris, ti Ministr ar Sportoù. Displeget zo bet eno ur wech adarre penaos e oa reizh e vefe sellet ouzh ar gouren e-giz ur sport dezhañ e-un.

Kaset e oa an dileuridi gant an eil-prezidant P. Le Joncour. Deut e oant asambles gant J. Peuziat hag Y. Dollio a zo kannaded Penn-ar-Bed hag Aodoù an Hanternoz. Evi-to-holl, n'eus rezon ebet e chomfe stag ar gouren eus ar stummoù-gouren all "libr", "greko-roman" ha "sambo" peogwir ne oar an F.F.L. tamm diouzh mod ar gouren ha peogwir n'eus gourener breizhat ebet enni.

Kenlabourat a c'hallfe ober bodadeg arc'hourennerien gant an FFL evit ar teknik hag evit ar peurrest, avat, e faot dezhi bezañ par d'an FFL. Ne faot ket d'arc'hourennerien vreizhat chom stag dezhi: gouest int d'ober war-dro o sport e-giz tud deut d'o ski-ant. Sed ha n'eo ket ar gouren savet ganto ouzh

penn ar pezh a lar an dekred niverenn 76.489 eus an 3 a viz Gouere 76 diwar-benn ar mod da vezañ anavezet e-giz "sport". Hervez al lezenn-se ez eus ur sport deus ar "gouren".

Pag o deus gwelet tud minister ar sportoù pegen krefiv e oa bolontez an dileuridi, sikouret gant an daou gannad breizhat, o deus ranket plegañ ha stagañ gant al labour "paperachoù".

Emañ bodadeg arc'hourennerien war evezh c'hoazh evit ma vo kaset an traoù war-raok d'an daou lamm. Rak aon he deus e chomfe sac'het an dossier war daolioù 'zo ha n'eo ket bet cheñchet o soñj gant ar re 'vez o labourat a-dreñv dezho c'hoazh.

Arabat disoñjal e oa bet embannet ar goulen-mañ bloaz hanter'zo. N'eo nemet bremañ eta e sav tud ar minister a-du gant ar goulen. Fiziñs he deus Bodadeg Arc'hourennerien e yalo ar maout ganti a-benn fin ar c'hrogad. War an hent mat emaint, war a seblant.

P. Ar Joncour.



Amañ en em gavas div bobl o vrezeliañ an eil a-enep eben. Met en amzer-se e oa ar bresel afer ar pennoù bras kentoc'h, keta ? Bez e oa roueed oc'h astenn o galloud war veur a bobl. Brezeliñ a raent evit o unan. Hogen, bez e oa pobloù bihan na c'housañvent ket ar gwaskezh estren, hag a vare da vare, en em save eus o c'hreiz ur penn-lu kalonek. Trec'h Ballon ne oa ket trec'h Nevenoe war Charles Voal hepken, met dreist-holl trec'h ar Vretoned war ar Franked.

An trec'h-se a chom stag c'hoazh ouzh hon buhez Breizhiz. Rak, petra e vije deuet da vezañ Breizh heptañ ? Daoust hag e vije bet anezhi, soken ? Kasi sur e vije aet da get ar brezhoneg abaoe pell. Hon Istor ne zle ket chom kuzh, rak outañ en em harp hon gwirioù. Poent eo kounaat !

Al lastez hag an drez a zo bet troc'het hiziv en-dro d'ar groaz vihan. Poent eo kounaat !

ned'h Istor, war ar re a zo aet er-maez eus he c'hreiz, ha darn anezho o vezañ marvet, evit ma chomfe-hi en he sav. Ha n'eo ket fae warni he-unan, war un dro ? Ha ne vije ket enta Pobl-Vreizh ur bobl wirion ? Kement-se n'on ket evit krediñ ! Ha n'emañ ket ar bobl-se o kerzhout, goustadig d'an nebeutañ ? Evel ur vaouez kozh o tostaat ouzh penn-diwezhañ he buhez ? Pe oc'h ober kammedoù kentañ hec'h adhanidigezh, evel a gavfen gwelloc'h krediñ ?

Neuze 'ta, e vo d'ar 26 a viz Mezheven "Devezh ar Vro" ? Ur seurt sinema mod kozh, petra. E-kichen Redon ? Ne vez ket komzet brezhoneg du-hont. Se zo mat evit ar paour kaezh "galloed", kollet o fenn ganto, ur gudenn a berseodet ganto.

"Gwelloc'h zo d'ober : stourm evit ar brezhoneg da skouer. - Ha stourm evit Breizh, neuze ? - Breizh ? N'ouzoc'h ket emañ-hi e kement lec'h m'emañ ar brezhoneg ?"

BEP DAOU VIZ LENNIT

## AL LANV

KELAOUENN

SOKIALOUR

BREIZHEK

KOUMANANT BLOAZ : 50 lur  
SKOAZELL : adalek 100 lur.

da AL LANV 8 st. Enez Vaz  
29000 - KEMPER

BREMAN NIVERENN 19

MIZ EBREL 1983

## TAOLENN

LIZHIRI DA VREMAN.....	2
BREZHONEG	
GOUEL AR BREZHONEG.....	3
SOLDAT FRANSEZ.....	3
LABOUR-DILABOUR	
DU,DU STAD AL LABOUR E BZH.....	4
UR C'HUZUL EKONOMIKEL.....	4
KEMPER EBET HEP HE FIJOU PRI	5
BROIU ALL	
OC : YEZH OFISIEL.....	6
DEVEZH AR VRO:DEVEZH STOURM	6
ARME : PROSEZ DISENTERIEN..	6
PENNAD KAOZ	
STROLLAD KARAEZ.....	7
LABOUR DOUAR	
UR PENN DEVEZH GT S.GEORGE.	8
KELEIER	
AN TIMBR-KARR ADARRE.....	9
GOUREN DISTAG ! .....	9
LIDAN TREC'H BALLON.....	9
BERR-HA-BERR	
KAZETENNOU.....	10
BUAN.....	10
KEMENADENNOU.....	10
TAOLENN.....	10
BREMAN-8, st.HOCHE-35- ROAZON- Koumanant evit 12 NIVERENN.. :	
96 LUR- SKOAZELL : ouzhpenn...	
MAKETENN SAVET GANT.....: Silvi Donnart,Lena Louarn,Joel Don- nart, Jil Killevere.	
PENNADOU SAVET GANT... : Erwan Ar C'hoadig, Tangi Louarn,Joel Donnart,Mark Kerrain, Strollad Karaez, Y.F. Jacq, Fanch Man- don, Herve ar Bihan, Paul Le Joncourt, Emile Granville, Mi- kael Tanguy.	
TRESADENNOU GANT: Malo Louarn, Nono, Tudu, Michel Plessix.	
LUC'HSKEUDENNOU GANT:Le Peuple Breton, Ouest-France, Breizh, Strollad Karaez,Skol An Emsav.	

MOULET E:Ti Moulerezh Al Lisoù  
13, st.Moneiz-Roazon- 79.46.78.

An pennadoù sinet ne engoues-  
klont naset ar re o deus z'vet  
anezho.

C.P.P.A.P. 62974

Kazetenn di-kloniet hervez le-  
zenn ha tennet 800 skouerenn  
anezhi. ISSN: 0246 - 5264

Skrivit

e-barzh

## DIWALLIT

Evit Niverenn Miz Mae 83  
kasit ho pennad arak an 02  
a viz Mae (keleier hag all...)

## KAZETENNOU

## ...BUAN...

● N'eo ket en ur lenn ka-  
zetennou pemdezic ar (RANN-)  
vro e c'haller deskiñ kalz a  
dra a-zivout ar brezhoneg na  
sevenadur Breizh. E-barzh an  
Telebramm eo bet kavet e oa  
re c'hoazh gant pennad siz-  
huniek Roje Laouenan. Un  
tamm muioc'h a blas da reiñ  
brud d'an arme, aotrou ren-  
ner !

● Lennerien ar bajenn  
skinwel en "Ouest-France" o  
deus gallet gouzout e yae en-  
dro e Breizh Veur ur Pevare  
Chadenn. Gortoz a reont  
c'hoazh ken e vefe laret de-  
zhe e vez abadennoù kembraek  
e Kembre.

● N'eo ket en hor c'haze-  
tennoù pemdezic hor bije  
lennet e oa bet yezhoù "bi-  
han" ar Frañs en "Expolan-  
gues", diskouezadeg veur ar  
c'helenn yezhoù, e Pariz e  
miz C'hwevrer. E-barzh an  
"Times Higher Education Sup-  
plement" avat (25/2/83) ez  
eus bet kaoz anezhe. Meneget  
eo bet zoken e oa Bretoned o  
skignañ traktoù teiryezhek a-  
nep da bolitikerzh gorrek  
gouarnamant ar PS evit gwel-  
laat ar c'helenn brezhoneg.  
M'ho piñe lennet kemend all  
en Telebramm ho pefe gallet  
anavezout tud Skol An Emsav.

● "Euskadi-Information"  
(Ekin, MJC Polo Beyris, 64  
Baiona) zo ur gelaouenn viz-  
iek, oc'h adembann dreist-  
holl pennadoù eus "Eubata"  
(kazetenn sizhuniek e galleg)  
troidigezhioù eus Egin (pen-  
dezieke spagnoleg hag en eus-  
kareg) pe eus "Punto Y Hora"  
(sizhuniek divyezhek). Kaoz a  
vez e pep niverenn eus ar  
gwaskerezh hag ar bourevie-  
rezh en Euskadi, hag eus ken-  
labour polisioù an div stad.

● Niverenn miz C'hwe-  
vrer-Meurzh "Irlande Li-  
bre" oa unan dev diwar-  
benn istor ar Gouezeleg  
hag ar stourm evitañ en  
Iwerzhon.

## DIELLOU

● E niverenn Ebrel Y FORD  
GRON, ar gelc'hgelaouenn  
gembraek nevez, e kaver er-  
bedennoù hag alioù a-zivout ni-  
veradur ar bobl, a dlee  
c'hoarvezout e Breizh-Veur d'  
ar 26 eus ar miz. Arabat, eme  
ar rener degemer paperennoù  
skrivet e saozneg. Ret kemer  
paperennoù skrivet e kemb-  
braeg. Teurel evezh bras ivez  
da leuniañ ar c'hombod o sel-  
lout ouzh ar yezh. Ha bez' ez  
eus kalz Breizhiz o deus na-  
c'het degemer paperennoù  
skrivet e galleg e-doug an  
niveradur graet en hor bro un  
nebeut mizioù 'zo ?

(e CWALARN, niverenn 31, Me-  
zheven 1931).

**Ar bed Keltiek**  
**Kemper**  
2, Stried ar Roue Giralon  
2 (98) 95.42.82  
STAL LEVRIOù  
PLADENNOU  
ARTIZANELEZH  
SAL-DISKOUZ TAOLENNOU

E-touez ar 101 a bro-  
mesaoù graet gant Fañch  
Mitt a-raok mont da bre-  
zidant e oa unan a-zi-  
vout krouiñ un departa-  
mant nevez gant Bro-Eus-  
kadi an Hanternoz. Evel-  
just n'eus ket keloù ken  
da seveniñ ur seurt pro-  
mesa. Ar rannvroeladur a  
zo kaoz sañset : gant ar  
C'huzulioù-departamante-  
mañ ar galloud, hag hini  
ar Pireneoù Atlantel zo  
dalc'het gant an RPR, hag  
int a-enep d'ur seurt  
departamant. Evel Gui-  
chard, e penn "Broioù al  
Liger", a zo a-enep da  
adstagañ Bro-Naoned ouzh  
Breizh.

Isprefed Baiona (bre-  
mañ e ranker larout Eil-  
komiser ar Republik) Bro  
Euskadi, zo breizhat, Je-  
zequel e anv. D'ar 25 a  
viz C'hwevrer, pa oa bet  
aloubet an isprefeti (pen-  
naos 'ta ranker larout  
bremañ ?) gant tud Seas-  
ka, en doa kavet da he-  
mañ e lakent en arvar  
surentez ar Republik, hag  
"e raent gant doareoù a  
zegas soñjoù fall d'ar  
re a anavez an Istor".  
Mar deo ober oute nazied  
en doa c'hoant Jezequel  
d'ober, emañ prest moar-  
vat d'ober kemend-all  
ouzh al labourerien-dou-  
ar, micherourien, kelen-  
nerien, studierien medi-  
sinerezh (h.a.) a c'hoar-  
vez gante implij hevelep  
doareoù.



Hernu e Madrid (11 a  
viz Ebrel) o kinnig e  
varc'hadourezh : armoù  
ha kirri-hobregonet evit  
sikour gouarnamant so-  
kialourien Spagn da la-  
kaat an urzh da ren e  
Bro Euskadi. En anv an e-  
trevroadelouriezh, evel-  
just.

Ur promesa all, hini  
ar votadeg rannvro : a-  
benn 1984 e oa da vezañ.  
Ya, daou vloaz zo ! Ha  
ret vo gortoz c'hoazh. A-  
benn pegoulz 'vo ? Den  
ne oar.



Diskarget ar Peñseg  
diouzh e labour Ministr  
ar Mor, en do bremañ mui-  
oc'h a amzer da blefidi  
gant e zavez-lezenn  
kozh diwar-benn ar bre-  
zhoneg ha yezhoù all  
Frañs. Hufvreoemp...



Kavet e vo "Breman"  
e gwerzh en ur stal ne-  
vez digoret e kreiz-kêr  
Montroulez. "KORNOG" eo  
anv ar stal-se, ouzhpenn  
kazetennou e vo kavet  
levrioù, pladennoù, hag  
oberennoù arz keltiek  
ivez.

Fest-noz a-enep d'an  
Uranium savet gant CUIPG  
(Comite Uranium Informa-  
tion de la zone du Per-  
mis de Gwern), d'an 30  
a viz Ebrel e Beubri (sal  
sant-Pier), gant kanerion  
Beubri, Hilvern, Merc'hed  
An Avel, Ur strollad I-  
werzhonat, kanerion ha  
sonerion ar vro.

**SEIZH AVEL**  
ostaleri  
**KONFORT**  
**29 PRAD**

Mall bras a zo war-  
nomp o c'hortoz ar C'hen-  
dalc'h Keltiek a vo dalc-  
'het en Aberystwyth eus  
ar 25 betek an 30 a viz  
Gouere 1983.

Klask a reomp lo-  
jeiz marc'hadmatoc'h e-  
vit ar studierien hag an  
dud yaouank. D'ar re a  
fello dezho ez eus un  
dachenn gampiñ e-kichen.  
Met ret eo skrivañ a-  
bred (ar c'hentañ ar gwel  
lañ) da : DW Jones-Fferm  
Bryncarnedd-Ffordh Cla-  
rach-ABERYSTWYTH (pell-  
gomz: (0970) 34.50.-



Deskifi iwerzhoneg gant  
... OBER. Deut 'zo er-  
maez, nevez 'zo, ul levr  
da zeskiñ iwerzhoneg em-  
bannet gant OBER.

Troet eo bet e bre-  
zhoneg gant daou zen am-  
part war an div yezh. Al  
levr-mañ, hini M.Ni Ghra-  
da eta, a vo talvoudus  
kenañ d'ar re, brezhoneg  
ganto, o dije c'hoant da  
grefiñ gant yezh ar Gae-  
ltacht. Sikouret e vo ar  
skolidi gant kasedigoù  
evit ma vo reizh o dis-  
tagadur hag aesoc'h o  
labour.

Evit gouzout hi-  
roc'h, skrivit da OBER,  
Gwarenn Leurvaen, PLUFUR,  
22310 Plistin.

Gant OBER ez eus tu  
ivez da zeskiñ Kembraeg,  
Esperanteg, Istor Breizh  
ha... Brezhoneg evel just!

D'ar yaou 30 a viz  
Mezheven diouzh ar beure  
e krogo "Crash-Course"  
brezhoneg Skol Veur  
Breizh Uhel, hag e ehuo  
d'ar yaou 7 a viz Gouere  
d'abardaez. D'ar re a  
garfe heuliañ an devez-  
hioù-studi-se eo poent  
hastaf lakaat o anv, ha  
skrivañ da Servij ar  
Stummadur, S.V.B.U., 6  
bali G. Berger, 35000  
Roazon, pe neuze pell-  
gomz 16(99)59.09.40, pe  
54.99.55, post 1912).



K.E.A.V. (Kamp Etre-  
keltiek ar Vrezhonege-  
rien), ezel eus ar gen-  
evredigezh KUZUL AR  
BREZHONEG, a gemenn e vo  
dalc'het staj 83 e SKAER  
e Skol Sant Alan, fin miz  
Gouere.

Kregif a ray d'ar  
merc'her d'an noz 20 e-  
vit echuiñ d'ar sadorn  
30 a viz Gouere da greis  
teiz.

Renet eo ar staj e  
brezhoneg penn-da-benn.  
Digor eo d'an holl re o  
deus kroget dija da stu-  
diañ ar yezh, hag a c'hell  
en em zibab hep tremen  
dre ar galleg. Setu amañ  
da heul un nebeut resi-  
sadorioù diwar-benn ar  
staj :  
Diouzh ar mintin: kente-  
lioù hervez al live, dre  
strolladoù bihan. Studi-  
war ar yezh adalek ober-  
rennoù skrivagnerien,  
kaozeadennoù diwar-benn  
danveziou liesseurt, en-  
rolladennoù.

En endervezh : Hervez  
c'hoant ar berzhidi hag  
an amzer: kentelioù, kao-  
zeadennoù, staliou labour  
pe pourmenadennoù.  
Goude koan: abadennoù a  
bep seurt. Pep hini a  
c'hell degas binvioù se-  
nif, luc'hvannoù pe fil-  
moù da ziskouez eus un  
danvez a blij dezhañ.

Skrivañ da : K.E.A.V  
44, straed Jean Rameau-  
29000- KEMPER-

Buan hag aes e vo  
desket brezhoneg ivez  
eus ar lañ d'ar 6 a viz  
Eost, en "Institut Con-  
sulaire", 6 straed Ker-  
gelenn, 56100 An Oriant,  
pellgomz 16(97)64.37.80.  
Hastit larout d'o migno-  
ned, bep bloaz e chom  
tud e toull an nor.

D'ar sadorn 30 a viz  
Ebrel, war FR3 BZH, da  
8 eur 30 noz, o po tro da  
welet ar film "SOLDAT  
FRANSEZ" savet gant P.  
Durand-Prod. FR3 Roazon-  
Adskignet e vo war FR3  
ar C'hwec'hkorn d'an 11  
a viz Mae, da 10 eur noz.